

# CANCIUNEN

Var sujet ar brezel savet etre ar Franc hac ar Russi, gant ar c'hélaou ous ar victoriou goneet betec hirie gant an Durquianet hac ar Fransichen var ar Russiannet.

Me o ped, sper santel da réi din sclerijen  
Evit ellout expliqua d'am bredeur christien  
Perac zo brezel etre ar Russi ac ar Franc ;  
Selaouit mad, brétonet, mont a ran da gommard.

Er plac ma è bet ganet Jesus-Christ hor Zalver  
O deveus ar Gristenien abaouë pell amzer  
Cals a gouentchou, savet, hac ilizou santel  
Da celebri an ofic evit ar bobl fidel.

Nicolas Impalaer var ar bobl a Russi  
A glasque humilia Sultan bras an Turqui,  
Da c'hortos m'en divije cavet occasion  
D'er zounmetti en antier d'e zomination.

Evel ma è schismatiq a pab en e Iis  
E cred hea souveren a maestr d'ober d'e chis  
Ebars er plaçou santel, ha laqat dindannan  
An Durquianet a zo schismatiq eveltan.

Annonc a ra d'ar Sultan e tle protection  
Da quement Ture zo savet en e religion ,  
Ac evel zo dioute ouspen diou dredren ,  
E voa vel pa lavarje : ro din da gurunen.

Ar Sultan a brouv dean penaùs e lez peb den ,  
Catholig pe schismatiq, da heulia e lezen ;  
N'ell quet, emean, réi muioc'h de zujedi ,  
P'en deveus goarantisset liberte peb ini.

Neuze , Nicolas fachet a zigas eun arme  
Var douarou ar Sultan, behini, martzez ,  
Vit dere'hel penn d'ar brezel, var uguent Russian  
A zo deus a zoudardet en deus a vec'h unan.

Ervuzamant an Turqui e deus grët alianç  
Abaouë pell bras amzer gant gouarnamant Franc  
Eus a bini ec'h obtén protection , sicour  
Evit ellout supporti tolliou e adversour.

Rac dious-tu Napoleon a laquaz réi urzou  
Ma vije da Vezika casset batimantchou  
Da viret eus Nicolas douar Constantinopol  
Ac ampech tan ar brezel da grëgui en Europ.

Gant gouarnamant ar Franc, rouantelez Brôzos ,  
Evit souten ar Sultan a proteji e gos  
A eneb e adversour zo prest en eum glèvet ;  
Impalaer ar Russi zo bet èno boudret.

Rac Nicolas a sie var an oll gassoni  
Zo bet epad hir amzer etre ar Zos ha ni ;  
Mas da zicour an Turqui pa è bet question  
Ezomp oll en eum gavet er brassa union.

Ar Franc evit sourcial e devoa diou rëzon :  
Da guenta evit ampech eun uzurpation ;  
Ha d'an eil evit difen ar droajou e deus bet ,  
Dre eur primod lijitim var oll moriou ar bed.

Rac ma vije Nicolas lezet gant e arme  
Da guemêret an Turqui, e tenje goude-ze  
Dre ar c'hrës-de ac an nord betec dorjou Franc  
Vit clasq on laquat esclao dindan e buissang.

An Turqui gant fianç en hon Impalaer  
A zalc'henn penn d'ar Russi gant eun arme dister ;  
Bopret e vije crenvoc'h, pa è guir, tra eston !  
E ranquas an adversour implij an drahizon.

Pa voa an Durquianet en o lestri tranquil ,  
En eur rad hanvet Sinop , an adversour subtil  
A deuas d'o surpreni , en despet d'eun-droad sacr ,  
A a laqas el lestri an tan hac ar massacra.

Napoleon glaich'aret eus eun torfet quer bras  
A scriyas var quement-se lizer da Nicolas  
Dre eul langach admirabl, mes ferm a moderet  
E lavaras : Majeste , eun tol fall oc'h eus grëd.

Poent e ze d'ec'h heana evit neum arranji  
Ar c'henta ma vo possibl gant Sultan an Turqui ;  
Ne laquit quet en trête condition rust  
An Almagn , Brôzos a me velo hac int zo just.

Ma n'heuliet quet va avis , neuze , va c'hamarat ,  
P'oc'h eus troublet ar peoc'h evo déc'hun ret mat  
Caout visit va zoudardet a yélo eb caout spont  
Dirac o faç da c'houlen venjanç eus an affront,

Nicolas a ziscrivas n'elle quet accepti  
Cuzuliou Napoleon roet gant modesti ;  
N'equet possibl, emean, e lezfen ar re all  
Eus ar pez azell ouzïn bepreat da zourcial.

An amiral Hamelin a recevas dioc'h-lu  
Urz digant Napoleon d'antreal er Mor-Du ,  
Gant e oll vatimantchou, ha rouanes Brôzos  
A laquas réi eveltan e urzou eb gortoz.

Ar vortolodet yaouang pere oll diaguent  
O devoa quittet tad, mam, c'hoar, mignonet, querent ,  
Evit mont var ar mör bras da beilla Cozaquet  
O devoa eun hast terrubl ma vije combattet.

Erruet evoant en faç d'eur gar eus ar Russi  
A zo hanvet Odessa, hac int oc'h arrêté ;  
Neuze var eur vatimant hanvet ar Furious  
E yas eur parlamanter e hunan hac eb trouz.

Dre ma è kær Odessa eur plac bras a gommerç  
Hac on doa c'hoant d'e guelet bopret ous e exerc  
E voa ret parlamenti eus ar Russianet  
Evit ampech na vije eur gombat angaget.

Pa voa tost d'ho c'hanouion erru ar Furious  
E voe hor batimantchou spouronnet gant an drous  
A rè ar Russianet gant obus ha mortier  
O tenna gant bouligi var ar parlamanter.

An amiral Hamelin ac e golleg Dundas  
En em lavaras neuze : red e vezo var c'hoas  
Rei eur quentel a zoare d'ar Gozaquet traiteur  
O deveus gant lachete tromplet o adversour.

D'ar zadorn daou varnuguent demeus a vis Ebrel  
Da c'hoec'h heur eus ar mintin, pa voa mad an avel  
Ero an daou amiral urzou vit commandant  
Bombardi azioch k'ez et ober deù offanç.

Razet vœu ar battiri bars en nebeut amzer  
Ar re o devoa tennet var ar parlamanter  
O deus collet o bue, mes d'an habitant  
Coulz ha da guer Odessa neus grët domaj ebet.

Eul lestr demp hanvet Vauban zo bet eun tam touchet  
Eiz den a zo bet blesset, a daou a zo lac'h'et;  
Mar o c'heus c'hoant da glevet betec an daou an :  
Unan zo Boissiereux ac eguielle Papo.

Neuze, dre ma ne voa quet an avel d'è control.  
E yañ hor batimantchou betec Sebastopol  
Elech' ma maint abaouë ac a volonte vad  
O c'hortos Russianet, da livra d'è combat.

Mes, an oll Russianet zo fin evel o maestr  
Pa ne ve mann da ober gant fusuil na gant lesrt  
Pe ma vent tri deus unan e zint hardi ato,  
Mes, pa yêr betec enne int cren da vont an dro.

Aroc an Durquianet o deus ranquet reded  
Eus a gær Soukoum-Kale, eb ar c'horn en obec,  
Cals a guestel eren all c'hoas en dro d'ar guer vrass-ze  
Zo bet, er memeus amzer, abandonnet gante.

Mitral, munitionnou, cals a vleud hac a c'haou  
O deus lezet var ar plac' ac ouspen cals a draou,  
Mes tiez ac llizou n'eus quet chommet unan.  
Dre oll, en eur basseal, o deus laquet an tan.

Tri eus o generalet a zo bet blesset bras,  
Unan aneze a zo eur mab da Nicolas  
Caer o deveus bet ober, n'en duit quet deut a ben  
Da guemeret Silistri gant pêvar ugurent mil den.

Gouscoude kær Silistri evit en eum difen  
Ne devoa quet, m'en assur, ouspen daouzec mil den  
Mes o c'houraj ac ar Franç diredet d'o zicour  
En deus laquet c'hoant reded ebars en adversour.

Goudre bea naviguet er Franç ac en Afriq  
Cals eus a vortolodet zo ed d'ar mor Baltiq  
Dindan urzou Parseval-Duchesn an amiral,  
Eun officer a dalant ac a fermete rall.

O mammou carantezus, c'hui a velan bepret  
O vouela dourec, bennos, en cornic an oalet,  
Pa zonjet en o milien partiet eus ar guer  
Eb gout ac int a elo distrei en o quever.

Ha c'hui, oll merc'hed yaouanq, evel an durzunel  
Pehini pa goll e far a neun lez da vervel,  
C'hui zo leun o calono a zizesper c'hoero  
Balamour d'ho mignonet zo ed ermes ar vro.

Sec'bit, sec'bit o taëlou, deut den eum gonsoli,  
Goal guer e d'o carante couster an disparti ;  
Mes Doue a zo puissant, bac e oll vadelez  
A bermetto ma voelfet c'hoas er guer o tud quez.

Hed d'an Ibis : Evidoc'h e chom digor an nor,  
Ha grit eur zell a drue ous stereden ar mor ;  
Goulennit a greiz calon ouz a Verc'h-es-Santel  
Ma tistroyo o querent souden da Vreis-Izel.

Ni etreomp bretonet, en eus bet a viscoas  
Eur respes meurbet padus ac eun interest bras  
Evit ar plaçou santel pere o deveus bet  
An enor da gaout enne Jesus, salver ar bed.

Clévit, soudardet yaouanq, eun avis profitabl,  
A beurs oc'h oll mignonet ac o tud respectabl :  
N'ancouëc'het biquen na Doue nac o tad,  
Nac o mam carantezus, chommit Christénien vad.

E creis an oll danjeriou, var vor a var douar,  
O pet sonch oc'h eus lëzet bras en brassa glæchar  
Ho querent, pere homde a bed a greis calon  
Evit o prosperite, ho conservation.

Red è dec'h caout en arme cals a obeissanç,  
Bezit digna a visiquen a vreis a deus ar Franç,  
Ha Doue evit paec ho fe o vaillantis  
A rayo dèch' caout victor a distréi var o quis.

Ni ho suppli d'an daoulin, Itron santes Anna  
Chui pini e zisque demp ar garante vrassa  
Chui hor mam, hor batrones, hor madoberoures,  
O grit eur zell a drue ous a vrétonet qués.

Guelet oc'h eus a viscoas en oc'h Ibis sanctel  
Var an daoulin dirasoc'h ar bobl a Vreis-Izel  
A viscoas ec'h obtainomp diganec'h or requet,  
Er vech man, santes Anna, ni vo c'hoas exaucet.

Chui oc'h eus digant Jesus ac an Tad Eternel  
Ar gallout da rëi deomp, er peoc'h ac er bresel,  
Quement a so necesser d'hor c'honsolation  
Lésit ganemp o sicour ac o protection.

Esper on eus da velet hor bugale distro,  
Dre o craç ne vesint quet goal bell ermes ar vro,  
Grit m'o devo ar bonheur d'ellout eun deis repos  
Bars en douar biniguet m'edi o sadou c'ds.

Ha c'hui, Guerches admirabl, Itron Vari ar Vur,  
Chui en pini-on eus oll eur fisiong dreist musur,  
Eus a bales an envoù en pini m'oc'h o ren  
Besit or protectoures c'hui or mam souveren.

Nac a vech on eus guelet e tréid oc'h oteriou  
Mortolodet n'eum gavet er brassa danjeriou  
Pere, dre ho'ch oll gallout voa bet trech' d'ar maro  
Ac a voa, dre o craçou, distract en o bro.

Grit m'or deveso souden ar gonsolation  
Da velet en o chapel ar vrétonet guirion  
Pere so ed d'an arme da souten eur gaus vad  
Hac o d'o c'hoas ar bonheur da velet mam ha tad.

## P. DERRIEN.

### Propriété de l'Auteur.